

texte original	transposé en breton moderne
[partie gauche de la page :]	
1 a bers ¹ doue or mest ac on autrou eo deut ² an eal da anonc ar chelou dar verhes sacre ³ penaos eo destinet da vesa mam da salver ar bet ⁴	A-berzh Doue hor Mestr hag hon Aotrou Eo deut an ael da anofis ar c'heloù D'ar Werc'hez sakr, penaos eo destinet Da vezañ mamm da Salver ar bed.
5 Me o salud dre vir devotion o guerhes sacre or mam ac on itron dre ar salud ⁵ a Glefoech ⁶ gant an eal deomp de ⁷ Glevet abers doue eternal ⁸	Me ho salud, dre wir devosion, O Gwerc'hez sakr, hor mamm hag hon itron, Dre ar salud a glevfoc'h\$ gant an ael Deomp d'e glevet a-berzh Doue eternal.
Me o salud mari guerhes antier	Me ho salud, Mari, Gwerc'hez antier !
10 chui a so choaset evit mam dor salver ⁹ chui so ive remplisset a chrasou Gueneoch beppret emedi on autrou	C'hwi zo choazet evit mamm d'hor Salver, C'hwi zo ivez rampliset a c'hrasoù Ganeoc'h bepred emedi hon aotrou.
Me a so bebporet da Zoue servicheres ¹⁰ ne don quet din da veza e vagueres ¹¹	Me a zo bepred da Zoue servijerez, Ne don ket din da vezañ e vagerez !
15 ra vezo great herves ar comsou se prest on gant joa dober e volante ¹²	Ra vero graet hervez ar c'homzoù-se, Prest on gant joa d'ober e volonte(z).
Beniguet ouch dreist an ol gragues ¹³ a beniguet eo ives ar froues ¹⁴	Benniget oc'h dreist an holl gwragez Ha benniget eo ivez ar frouezh
och eus douguet epat nao mis antier ¹⁵	Hoc'h eus douget e-pad nav miz antier.
20 Jesus eo ¹⁶ or mest ac or barner ¹⁷	Jezuz eo hor mestr hag hor barner.
Guir vap doue a so enem incarnet ¹⁸ evidomp oll eo enem abimet ¹⁹ evidomp ol eo devet ²⁰ var an douar dre e vadeiles ²¹ don lamet a glahar ²²	Gwir Vab Doue a zo en em inkarnet Evidomp-holl eo en em abimet Evidomp-holl eo deuet war an douar, Dre e vadelezh, d'hon lamet a c'hlac'har.
[la partie droite de la page ms. commence par trois lignes rendues illisibles, suivi d'un trait horizontal]	
25 Santes mari Guir vam da vap doue pedit brema ²³ pedit da peb ²⁴ mare evidomp oll peherien ingrats ²⁵ a ma ²⁶ varfint gant o grac e stat vat.	Santez Mari, gwir Vamm da Vab Doue, Pedit bremañ, pedit da bep mare, Evidomp-holl pec'herien ingrat Ha ma varvint gant ho kras e stad vat.
Tri foent caer so en oregon ma ²⁷	Tri foent caer zo en orezon-mañ :
30 an eal gabriel en deus ²⁸ great ar quenta ²⁹ en eil varlerch santez elyzabet ac an tre an ilis biniguet ³⁰	An ael Gabriel en deus graet ar c'hentañ, An eil, war-lerc'h, santez Elizabet, Hag an trede an Iliz benniget.
Cristenjen ³¹ oll e ³² tleomp teir gueach bemdes ³³	Kristenien, holl e tleomp, teir gwech bemdez,
dre an tri foent ma saludi ar verhes ³⁴	Dre an tri foent-mañ, saludiñ ar Werc'hez
35 o lavaret angelus ac ave naos ³⁵ a mintin a da cresteis ive.	O lavaret <i>Anjelus</i> hag <i>Ave</i> Noz ha mintin ha da greisteiz ive(z).
Evit pedy or guir vam a drues da veza evidomp ur ³⁶ guir advocades ³⁷ da supplia eil person an dreindet	Evit pediñ hor gwir vamm a druez Da vezañ evidomp ur gwir advokadez Da supliañ eil person an Drinded
40 ma vezimp oll en or fin curunet ³⁸	Ma vezimp holl en hor fin kurunet.

¹ a bers plutôt que Aberz² je lis deut et non deuet.³ avec un e fautif (influence du français ?).